



KENOBER ETRE KEMBRE HA BREIZH STEUÑV OBER

Ur **Feur-emglev Kenober** e teir yezh (saozneg, galleg ha kembraeg) a oa bet sinet etre Kembre ha Breizh, d'ar 15 a viz Genver 2004, e Roazhon. E miz Here 2004 e oa bet sinet ur stumm e brezhoneg. Diouzh an emglev-se, setu amañ dindan ar steuñv ober boutin bet termenet gant an div rannvro.

1. An diorren padus

Diouzh ar Feur-emglev bet sinet e 2004 e talvezo ar c'henober da ziorren buhez annezidi an eil rannvro hag eben war hir dermen (ar c'henober en deus da bal an diorren boutin ha padus, evit mad annezidi an div rannvro). Dre se e fell da Gembre ha da Vreizh diorren liammoù kenober ha krouiñ raktresoù boutin e-sell da gaout disoc'hoù padus war an dachenn armerzhel, sokial ha war dachenn an endro, dre ar pennoberoù-mañ :

- eskemm skiant-prenet a-zivout deiziataerioù 21 an eil rannvro hag eben.
- eskemm skiant-prenet ha brudañ roll ar rannvroioù war dachenn an diorren padus, dre gemer perzh e rouedadoù rannvroioù da skouer (evel : NRG4SD, Régions sans OGM, CRPM).
- lakaat ar badusted armerzhel, sokial ha padusted an endro da ziazezoù ar c'henoberoù tematek.

2. An diorren armerzhel hag an nevezadennoù

War dachenn an diorren armerzhel e talvezo ar Steuñv Ober da greñvaat ar c'henoberoù er gennadoù a laz boutin, evel hini an teknologiezhioù nevez. Klask a ray an div rannvro talvoudekaat o filierennoù hag o barregezh skiantel ha teknologel, dre ar pennoberoù-mañ :

- eskemm titouroù ha diorren darempredoù strishoc'h etre an embregerezhioù dre hanterouriezh Ajañs Rannvroel Diorren Armerzhel Breizh ha Rann Bodadenn Vroadel Kembre evit Nevezadennoù an Embregerezhioù hag ar Rouedadoù.

- termeniñ un niver resis a varc'hadoù digor, er gennadoù a zeu a-wel da skouer, hag ivez lazioù ha barregezhioù boutin, gant ar pal diazezañ ur c'henober emsav da gevredadoù an div rannvro.

- lakaat Ajañs Rannvroel Diorren Armerzhel Breizh ha Rann Bodadenn Vroadel Kembre evit Nevezadennoù an Embregerezhioù hag ar Rouedadoù da renabliñ foarioù ha saloñsoù kenwerzhel an eil rannvro hag eben, e-sell da vroudañ an embregerezhioù da gemer perzh en darvoudoù armerzhel-se.

- eskemm ha brudañ ar boazioù gwellañ war dachenn an nevezadennoù hag an teknologiezhioù uhel.

- kregiñ d'en em soñjal war an doareoù morlinennoù a c'hall bezañ savet etre Breizh ha Kembre ha war ar c'hammedoù prevez evit sevel aerlinennoù.

- e-barzh ar rouedad Eris@, stag ouzh programmoù Europa a denn d'an Oberoù Nevezadus ha da Deknologiezhioù ar C'helaouiñ hag ar C'hehentiñ, termeniñ temoù a laz boutin evit gallout eskemm skiant-prenet ha lakaat raktresoù europat war-sav.

3. Al labour-douar ha diorren ar maezioù

War dachenn al labour-douar ha diorren ar maezioù e talvezo ar c'henober da ziorren an eil rannvro hag eben o talvoudekaat o spletoù, en ur ziwall da wareziñ an endro, dre an oberoù hag ar pennoberoù-mañ :

- kenderc'hel da eskemm skiant-prenet a-zivout skodoù ar filierennoù a bep seurt, filierenn al laezh pergen, a-dal d'ar c'henwerzh bedel, d'ar stalioù bras hag all.

- eskemm titouroù ha lakaat war-sav kenoberoù teknikel war dachenn al labour-douar padus ha biologel ha war hini liesaat an obererezhioù (touristerezh an atantoù, bioenergiezhioù).

- termeniñ kevelerien a c'hallfe bezañ war dachenn al labour-douar padus.

- aozañ an eskemmoù dre gemer perzh e saloñsoù micherel arbennikaet war al labour-douar hag ar boued, goude bezañ termenet ha dibabet anezho a-gevret, hag ivez e saloñsoù gounezvouederezh.

- sevel ha kreñvaat kenoberoù etre diazezadurioù stummañ eus an div rannvro a bled gant al labour-douar hag ar gounezvouederezh (eil derez, deskadurezh uhel ha stummerezh dibaouez).

- eskemm titouroù a-zivout gwarez ha talvoudekadur glad sevenadurel ar maezioù.

4. Ar yaouankiz, an deskadurezh, ar stummerezh, an enklaskerezh,

Niverus hag a-zoare eo al liammoù skoulmet etre Breizh ha Kembre war dachenn ar yaouankiz, an deskadurezh, ar stummerezh hag an enklaskerezh. Gant an div rannvro e vo roet harp da gas war-raok ha da stankaat an darempredoù a zo, ken war dachenn ar stummerezh kentañ, dibaouez pe micherel, ken war dachenn an deskardelezh pe an deskadurezh uhel.

- kas war-raok ha diorren kenoberoù nevez etre liseoù kelenn hollek, teknologel ha micherel Breizh ha Kembre.

- kas war-raok ar c'henoberoù a zo en deskadurezh uhel, hag en o zouez etre Skol-veur Kembre ha Skolioù-meur Roazhon 1 ha 2 ha Skol-veur Breizh-Izel, e framm ur programm nevez, ar Programm Enframmet Deskiñ ha Stummañ a-hed ar vuhez, hag astenn ar c'henoberoù-se da skolioù all, dre dermeniñ unan a c'hallfe keveliñ gant Skol-veur Kreisteiz Breizh da skouer.

- e doare pe zoare, harpañ an eskemmoù etre ar re yaouank, e framm ar skolioù, ar skolioù-meur, ar stummerezh micherel hag ar stummerezh dibaouez, hag ivez er c'hevredigezhioù.

- sikour da glask aozadurioù eus Kembre a c'hallfe keveliñ gant Ensavadur skol-veur ar Stummañ Mistri e Breizh, gant ar pal aozañ dalc'hoù etrebroadel evit stummañ kelennerien.

- e-barzh ar rouedad EARLALL (Kevredigezh Europat ar Pennadurezhioù Rannvroel ha Lec'hel evit ar Stummerezh a-hed ar vuhez), kreñvaat al liammoù hag an darempredoù etre Breizh ha Kembre evit mont pelloc'h gant ar raktresoù boutin a zo war dachenn ar stummerezh a-hed ar vuhez.

5. An endro

Diouzh ar Feu-emglev bet sinet e 2004 ha diouzh reolenn ar badusted e talvezo ar c'henober etre Breizh ha Kembre da genderc'hel da gas ar palioù-mañ war-raok :

- klask kevelerien evit eskemm skiant-prenet war dachenn an deskadurezh a denn d' an endro pe da warez an endro naturel.

- eskemm skiant-prenet a-zivout ar raktresoù a zo bet lakaet war-sav betek-henn, e gennad an ekolojeiz da skouer.

- lakaat war-sav ur c'henober war dachenn perzh an dour (pourveziñ ha tretañ), ha kemer perzh e kendivizoù an div rannvro war an tem-se.

6. Ar yec'hed

Liammoù a zo bet skoulmet dija etre servijoù yec'hed an div rannvro hag obererezhioù boutin a zo deuet da wir diwar o atiz. An div rannvro a sikouro da ziorren an darempredoù etre frammoù kevatal an eil rannvro hag eben, dre anavezout

perzh an holl ziskiblezhioù en damantiñ yec'hedel ha sokial eus an dud hag ivez spletoù an diorren raktresoù boutin. Setu amañ ar pennoberoù :

- anavezout, en eil rannvro hag eben, ar reizhiadoù mezegiezh, ar reizhiadoù obererezh sokial, o aozadur hag ivez an doareoù stummañ a vez kinniget war an tachennoù-se.

- klask kevelerien evit ar raktres a zo da sevel binvioù priziañ ha ditourennoù war an temoù a zedenn an div rannvro (hag en o zouez, ar feurioù dreistmarvelezh hag an ditourennoù war ar yec'hed ha kempouez ar vuhez, da skouer).

- lakaat war-sav kenoberoù etre an diazezadurioù stummañ e gennadoù ar yec'hed hag an obererezh sokial, ha moduloù stummañ boutin.

- krouiñ liammoù kenober etre klaskerien hag aozadurioù enklask war dachennoù ar yec'hed hag an obererezh sokial.

- termeniñ kevelerien a c'hallfe kenlabourat gant Arsellva Rannvroel ar Yec'hed e Breizh hag eskemm stajidi etre an eil keveler hag egile.

- diorren an eskemmoù etre ENSP Roazhon (Skol Vroadel ar Yec'hed Foran) ha servijoù yec'hed Kembre, e-sell, da skouer, da ziazezañ ur c'hursus studioù master boutin evit gallout kreñvaat ar c'henober a zo dija. A-hend-all, diorren eskemmoù gant Kreizenn Yec'hed Kembre (Canolfan Iechyd Cymru).

7. Ar sport hag an touristerezh, liammet gant ar bageal pergen

War dachenn ar sport hag an touristerezh e vo diazezet ar c'henober etre an div rannvro war ar pennoberoù-mañ :

- kenderc'hel da grouiñ liammoù war dachenn ar bageal, dre ar raktres nevez « Bageal Takad Atlantel », darvoudoù mor all hag obererezhioù boutin a c'hallfe bezañ talvoudus en dazont.

- brudañ an eil rannvro hag eben dre skignañ teulioù touristel, kemer perzh e saloñsoù hag aozañ beajoù evit an dud a vicher e gennad an touristerezh.

- lakaat burevioù touristerezh an div rannvro da eskemm skiant-prenet ha da sevel raktresoù boutin.

- studiañ ar c'henoberoù a c'hallfe bezañ e-barzh Rouedad Touristerezh Sevenadurel Europa.

- kreñvaat al liammoù etre ar c'hevreadoù sport (eskemmoù etre stummerien, etre tud yaouank) : rugbi, mell-droad, atleterezh...

8. Ar sevenadur hag ar politikerezh yezh

Abaoc'h pell e kenlabour an div genitervez keltiek war dachenn ar sevenadur. Ret e vo kas ar c'henober-se war-raok ha harpañ raktresoù dizoleiñ an eil rannvro hag eben, war ziazez ar pennoberoù-mañ :

- sikour da ziorren raktresoù sevenadurel boutin, dreist-holl a-benn kreñvaat al lazioù boutin a zo stag ouzh ar sevenadur keltiek.

- kemer perzh e festivalioù ha darvoudoù a vrud al liammoù etrekeltiek.

- eskemm skiant-prenet a-zivout aozadur ar filierennoù war dachenn ar groudigezh sevenadurel (sonerezh hengounel,...) hag ar mediaoù (kleweled, skingomz...).

- kreñvaat ar c'hevelerezh hag an eskemmoù eus ar pleustroù gwellañ etre Bwrdd yr Iaith Gymraeg hag Ofis ar Brezhoneg, ha dre-vras, etre an holl ensavadurioù a vrud ar brezhoneg hag ar c'hembraeg, hag ivez e-barzh Rouedad Ofisoù Yezh Europa.

9. An eskemmoù etre ar strollegezhioù lec'hel

Un niver bras a eskemmoù a zo dija etre strollegezhioù Breizh ha Kembre (un 40 bennak a emglevioù kenober pe gevelladennoù zo etre kumunioù Breizh ha Kembre). Gant an div rannvro e vo sikouret kreñvaat al liammoù keveliñ-se, dre ar pennoberoù-mañ :

- liesaat ar gevelladennoù etre ar c'humunioù ha kenvodañ o skiant-prenet, dre lakaat war-sav raktresoù a vodfe ar c'humunioù gevellet pe un darn anezho.

- krouiñ ha brudañ liammoù etre kontelezhioù Kembre ha broioù Breizh, dre skoulmañ darempredoù, eskemm titouroù, diorren ha lakaat war-sav raktresoù boutin emsav d'ar strollegezhioù a gemero perzh enno.

10. Aferioù Europa

Fellout a ra d'an div rannvro lakaat o c'henober e framm hollek Unaniezh Europa. Evit se e vo kreñvaet ganto o c'henober hervez an ahelioù-mañ :

- kreñvaat al liammoù etre burevioù dileuriañ an div rannvro e Brusel, e-sell da ziazezañ ur c'henurzhiezh efedus a-fet eskemm titouroù diwar-benn Europa.

11. An demokratezh-perzhiañ

Diouzh pennaenn an diorren padus e vo lakaet keodedourien an div rannvro da gemer perzh er c'henober. Evit se e vo gwelet penaos krouiñ ul lec'hienn Genrouedad

boutin pe div lec'hienn arbennikaet war ar c'henoberoù hag an eskemmoù etre
Kembre ha Breizh.

Sinet e Roazhon, d'an/ar

Evit Rannvro Breizh

Evit Kembre

Jean-Yves an Drian

Rhodri Morgan